

Taolenn an dudi brezhoneg evit ar vugale hiziv

Ne vo ket meneget er pajennoù-se al labour kaset gant an embannerien hag ar mediaoù evit kinnig d'ar vugale levrioù kaer hag abadennoù radio ha te plijus. Eus an dudi a-stroll e vo kaoz dreist-holl.

Mont da vakañsiñ a-stroll e-kerzh an hañv

Un nebeud sifroù

Niver	hañv 2005	hañv 2006	hañv 2007
Kreizennoù vakañsoù	16	17	22
Kreizennoù dudi	1	3	3
Kreizennoù vakañsoù ha dudi	17	20	25
Bugale bet e kreizennoù vakañsoù	315	354	487
Bugale bet e kreizennoù dudi	10	50	48
Bugale bet e kreizennoù vakañsoù ha dudi	325	404	535
Devezhioù vakañsoù	2345	2968	3773
Skolidi CP > 3de er rummadoù divyezhek	5130	5625	6056
Vakañsidi/skolidi CP > 3de	6,3 %	7,1 %	8,8 %

Merzet e vez ez eus bet ur c'hresk bras a-walc'h war ar c'hreizennoù vakañsoù ha dudi etre 2005 ha 2007 (+ 64 % a vugale) met bihan-bihan e chom an dregantad a vugale a ya da vakañsiñ e brezhoneg e-keñver an niver a vugale skoliataet er rummadoù divyezhek etre ar CP hag an 3de klas (8,8 % e 2007*). 100 % eus ar vugale skoliataet e brezhoneg o vont da vakañsiñ e brezhoneg e-pad ur sizhunvezh bep bloaz : setu an huñvre ! Met pell 'mañ Yann eus e gazeg...



Un nebeud evezhiadennoù war an hañv 2007

22 greizenn vakañsoù (21 e brezhoneg hag unan e gallaoueg-galleg) ha 3 c'hreizenn dudi o doa degemeret bugale e-kerzh an hañv 2007. 9 c'hreizenn war 25 a oa anezho raktresoù nevez (da skouer : ar greizenn Dao Pschiit schlak war ar skiantoù, Ar bleiz zo deuet en-dro, Raid er Menez-Are, Melldroad). 11 aozer disheñvel a oa : re gustum (An Oaled, Ti ar c'hoadoù, COCOPAQ, KEAV, Gevred, MPT Landerne) ha re nevez (Studi ha dudi, Ti an oll Plourin-Montroulez, KLT, La Fédé, les Assemblies galletses).

E 2007, evit ar wech kentañ, e oa bet embannet ul levrig brudañ gant UBAPAR hag an aozerien greizennoù. Liv flamm warnañ, displegadennoù war bep kreizenn, ur follenn enskrivañ boutin d'an holl aozerien, skignet en holl skolioù kentañ ha skolioù divyezhek, un deiziad termen lakaet evit an enskrivadennoù... degemeret mat-tre e oa bet al levrig-se gant ar familhoù. Muioc'h a vugale o doa lakaet o anv, hag abretoc'h eget er bloavezhioù all.

Rannvro Breizh ha Kuzul-meur Penn-ar-Bed o doa diskouezet o youl da gas ar c'hampoù vakañsoù war-raok o skoazellañ muioc'h an aozerien hag ar familhoù. Gant se e oa bet kinniget prizioù marc'had-matoc'h, un dornad kampoù o vezañ dindan 150 € ar sizhunvezh zoken ; ha familhoù zo, ha ne oa ket kreñv o yalc'h, o doa gallet kas o bugale memes tra.